

POTRED AN AMERIK (1)

Bremañ pa 'ma deut ar goañw, dister ar labouriow
Me 'meus laket ma spered da gomposiñ soniow

Me n'on ket pab na beleg, kenneubeud skrivagnour
Ma vankon da ressitañ, me ho ped d'am jikour



Démeus pôtrez Breizh-Izel a gêjeon doc'h hiriw
A zo eet t'an Amerik 'wid gounid dollariow

Mes kaled ê ar vuhê én amzer 'zo bremañ
Ar bewañs a zo ken kêr, dister ar bêamant

Ar bewañs a zo ken kêr, an dilhajow iwê
N'hall ket kén ar labourer sevel mad é vugwale

Ha kuiteet 'meus Breizh-Izel, kêrrañ bro 'zo wa'r bed
É véwiñ gant espérañs d'honed c'hoazh d'hé gweled

Treuset a meus ar mor bras 'vel gwir vartoloded
Dégouezet én Amerik, brassañ bro 'zo wa'r bed...

LES AMERICAINS (1)

*Maintenant l'hiver venu, les travaux sont peu nombreux
Je me suis mis en tête de composer des chants*

*Je ne suis ni pape ni prêtre, non plus écrivain
Si je manque à réciter, je vous prie de m'aider*



*Je vous parlerai aujourd'hui des gars de Basse-Bretagne
Qui s'en sont allés en Amérique pour gagner des dollars*

*Mais la vie est rude par les temps qui courent
La nourriture est si chère, la paye si ridicule*

*La nourriture est si chère, ainsi que les habits
L'agriculteur ne peut plus élever correctement ses enfants*

*J'ai donc quitté la Basse-Bretagne, le plus beau pays du monde
Vivant dans l'espoir de revenir la voir*

*J'ai traversé l'océan comme les vrais marins
Je suis arrivé en Amérique, le plus grand pays du monde...*